



Al lapined lontet

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv ?

evit ar re vihan betek CE1

Pal

Sentiñ ouzh ur reolenn, mont war-raok war un hent ; anavezout al livioù.

Kemennadur « Naon du o deus al lapined ! Piv vo ar c'hentañ o tebriñ e garotezenn ? ».

Doare da ober

Peder vell, livioù disheñvel ganto, a vo lakaet en ur sac'h divoull (didreuzwelus) pe en ur voest.

Ar ruilhennoù, o livioù heñvel ouzh re ar melloù a vo lec'hiet war al leur dre an urzh diskouezet a-us. R ruz, Gw gwer, Gl glas, M melen.

Doare da c'hoari

Tennet e vez ur vell eus ar sac'h divoull en un doare degouezhus. Betek kelc'h kentañ al liv lavaret gant ar skolaerez pe diskouezet gant ar volotenn ez aio an tri bugel kenlodek (pe an tri lapin). An hini kentañ erruet d'ar garotezenn en do gounezet.

Amzervezh

Amzer da bephini da c'hoari ur wech d'an nebeutañ mar n'int ket niverus 20 munud d'ar muiañ

An danvez

24 c'helc'h : 6 ruz, 6 glas, 6 gwer, 6 melen
3 c'hordenn evit diskouez al loc'hañ
4 mell (bolotenn), 1 ruz, 1 c'hlas, 1 wer, 1 velen
ur sac'h divoull pe ur voest
3 c'harotezenn wir pe get

Mont pelloc'h gant ar c'hoari

Legumaj all a gav mat al lapined. Pep renkennad a c'hell kaout ul legumajenn disheñvel, pe bep tro ez eus tu cheñch al legumajenn.